

KENTSKRID

Dre he furn n'eo ket disheñvel dekvet niverenn LAVAR diouzh ar re gent. Enni ez eus c'hoazh imbours'hioù hiniennel, eskemmoù, danevelloù labour strolloù (evel *Bodad ar Yezh arnevez*), “kuzuliadennoù” roet war grefen termenadurezh da arveriaded diseurt. Ledan eo bepred skalfad an danvezioù ergerzhet : Armerzh ha Kevredadelezh, Gwir ha Politikerezh, Lennegezh, Gramadeg, Semiotik ha Yezhoniezh, Fizik, Stlenneg ha Kalvezerezh greantel, Bevoniezh ha Mezekniezh, Bredoniezh ha Diougonerezh. An div dachenn pleustretañ ar wech-mañ eo ar Jedoniezh, gouestlet dezhi 18 notenn diwar an 94 a ra al levrenn, hag ar Brederouriezh (20 notenn).

Abegoù oa da reiñ lañs d'an div ziskiblezh-se.

Da gentañ prientidigezh al levr *Jedoniezh* da zont er-maez hevlene ivez. Abaoe ouzhpenn ugent vloaz e ren Yann-Baol AN NOALLEG ur c'henlabour war daou zanvez : an Armerzhouriezh hag ar Jedoniezh. Kentañ frouezh e strivoù zo bet *Geriadur an Armerzh, ar C'henwerzh hag an Arc'hant* embannet e 1995 ha deuet diouzhtu d'ul levr dave evit an arbennigourion hag ar studierion. Hep mar ebet e vo e *Jedoniezh* ur maen sol all evit ar brezhoneg.

Goude ma loc'has *Preder* evel “Kelaouenn a Brederouriezh” pergont vloaz 'zo e chom krak enni lodenn ar brederouriezh. *Primum vivere, deinde philosophari* — ranket hon eus plegañ d'ar reolenn. Petra d'ober endra na oa ket ar brezhoneg evit perzhiañ er vuhez kempredel nag ar vuhez vrezhonek evit genel ur gefredelezh nag ar gefredelezh vrezhonek evit donaat betek ma tellezfe an anv a brederouriezh ? — endra veze ar braz eus dalc'hiaded ar yezh dastumet e kluboù erezus ouzh kement oa kefredel ha kempredel, c'hoantus hepken da gomz ha da soñjal evel kouerion an 19^t kantved ? Antebek oa zoken, pa seller mat, e teuje devezourion da dresañ o erv e hevelep gouelec'h. Deuet int koulskoude ha mard eus roudoù priziuz en tamm douar-mañ ez eo o re : keit ma vo sevenet ur striv kefredel en hon yezh ez anavezo e zerou en o labour. Komz a ran eus Frañsez VALLEE a lakaas war ar stern hanc'herieg ar preder, eus Maodez GLANNDOUR a skrivas an testennoù kentañ a brederouriezh e brezhoneg an

20t kantved. Eus Roparz HEMON dreist-holl, ar c'henderc'her brezhonek kentañ o tamkanañ e obererezh ; ma ne rae ket gant termenoù kalvezel an diskiblezh e kemeras adalek ar penn kentañ un emzalc'h a ra anezhañ ur c'hempredad da brederourion hiziv ; pa lavaront : “ Anaout ha krouiñ zo an un tra ”, e lavare eñ endeo e 1930 : “ An un tra eo anaout ha krouiñ Breizh.”¹ Diwezhatoc'h, er bloavezhioù c'hwegont ha seikont, ez eo e-barzh atil *Gwalarn* e wrizienne ar vuhez kefredel doues dispaket gant SADED hag ESB. Enni e voe lodek *Preder* dre bourchas al loazioù yezhel dreist-holl. Emsaverion ar bloavezhioù-se, o selaou ali Roparz HEMON, o deus n'eo ket hepken digoret ar prenester met pilet ar mogerioù.

A-benn bremañ eo dieubet an dachenn ma c'hell prederouriezhoù diorren e brezhoneg. Moarvat e vo feal an aozerion da bennaennoù geriadurezh Frañsez VALLEE — met n'eo ket dre ret d'ar gerioù a c'hovelias. Feal ivez d'ar feiz a oa hini Maodez GLANNDOUR e bleuñvidigezh ar spered dre ar brezhoneg — o tiforc'h e feiz diouzh e amboaz sevel ur “ brederouriezh vreizhek ” dre glenkañ ar vreizhegezh e stern rakgraet ur “ brederouriezh kristen ”. Feal dreist-holl d'al lusk krouiñ a enaoue buhez Roparz HEMON — hep lezel digemm evit kelo rener na renadenn en e ditl “ *Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh* ”. Rak ar brederouriezh zo un afer a rezid a-raok bezañ un afer a lavar ; salv na rafent e-keñver yezh ar c'hammster a raemp e-keñver bro. Ret mat e spisaat : hep lavar preder ebet ha hep yezhoù lavar ebet, tec'hent neoazh diouzh an emvac'h a zo ober eus ur yezh an ampledad d'ur preder, krediñ ez eus ur brederouriezh en egin e genezh ur yezh — pa lavare HEIDEGGER war fin e vuhez ne c'haller prederiañ nemet en alamaneg, ne gav ket din e wele en e ziaraogerion ar broustennoù diwar ur mikeliom o treuziñ ar c'hantvedoù met kentoc'h an dud rez a grouas an alamaneg tamm ha tamm e ser prederiañ. Test omp bet d'ur burzhud, boutinat burzhud en istor evit gwir : evel ur viruz o kouezhañ den ne oar a belec'h e-barzh damgelan ar brezhoneg, oc'h ober d'ur preder dinodiñ ha war un dro d'ar brezhoneg dasorc'hiñ. Hetiñ ne c'hellomp ken ma ve burzhudoù eus ar seurt adarre evit mad ar preder ha berzh ar brezhoneg. Ar preder eo avat an talvoud gwir ha dioutañ, evel diouzh pep oberenn diles savet en ur yezh ha treuzskuilhadus d'ar bed, e tenn ar brezhoneg e gantreizh, n'eo ket ar gin.

¹ Etre hon daouarn raklizhad ur *Congrès européen* bredourion, bredelfennerion, yezhoniourion a vo dalc'het e Brest en nevezamzer evit plediñ etre traoù all gant daraez ar vugale o kemmañ idiom, meneg arbennik graet da Vreizh. Gouzout a garfemp petra a venner pareañ e bugale Vreizh ar bloavezh 2000. Un eikont vloaz 'zo e vije bet gwerc'hek ar prederiañ war ar c'hemmañ idiom, ha c'hoazh ne weler ket pezh en dije gallet ar Bredelfennerezh degas en degouezh. Splann e vo d'an holl un deiz e voe *Gwalarn* ar respont kantrat nemetañ.

Guy ÉTIENNE